

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

62. ER BLOA MAN HE KER AN ED

(follennoù 201 - 202)

er bloa man he ker an ed
a marc'hat mad ar merc'het.

evid daouliard e man ar c'hant
Da choas dar potret iaouank.

Me karfe kaout da prena
Daouliardet a nezan.

Me mond da bourmen var ar mes
hag ober peder mestres

Diou a nezo a voa koant
Diou all voa honestamant.

An diou koant a kemeris
An diou honestamant a lesis

An diou honestamant a lare :
Va c'hasset ganeoc'h ive !

hola, hola, emezan
tra voalc'h a meus breman

eur vech all pa deuin en dro
marteze mo kemero.

- eur vech all pa deuet en dro
A ben neuze me vo maro.

Me vo maro hag enterret,
Va c'horf e kreñs ar verret.

evid ma laro ar potret iaouank :
Aman zo enterret eur plac'h koant.

Aman zo enterret eur plac'h koant
Zo ed en douar gant he c'hoant.

Zo ed en douar gant c'hoant goas
Meur a hini a iello c'hoas.

Zo ed en douar gant envi
Mond a rei c'hoas meur a hini.

Me meus eur vezen en pen va zi
C'houec'h aval ruz a zo heni.

Daou din, daou dam mestres
A daou de c'hamarades

Ma voëzen piou em c'harre
Va c'houec'h avel en deffe

Mes pa ne ouzon piou em c'har
Me viro va c'houec'h aval.

~~~~~

Jannet K/guiduff 16 janv. 51

~~~~~